

Danevell Obererezh

2021- 2022- 2023

Berr-ha-berr



- 3** SPLANN, UR MEDIA KEVREDIGEZH
- 4** HOR SIFROÙ
- 5-8** HON ENKLASKOÙ
- 9** HOR C'HEVELERIEN
- 10** HON EMGAVIOÙ WAR AN DACHENN
- 11** PA VEZ DIFENNET FRANKIZ AR MEDIAOÙ GANEOMP
- 12** HOR SAVADOÙ
- 13** HON DISPIGNOÙ
- 14** PETRA A VEZ GRAET GANEOMP WAR AN DACHENN
- 15** HON IZILI
- 16** HOL LENNERIEN

SPLANN, UR MEDIA KEVREDIGEZH

« Splann ! » zo ar media kentañ gouestlet penn-da-benn d'an enklaskerezh e Breizh. E 2020 eo bet krouet, ha renet eo gant ur spered dizalc'h ha nann-genwerzhel. Se a zo kaoz en deus ezhomm *Splann!* bezañ skoazellet ganeoc'h-c'hwil, kuit da vezañ lakaet dindan gwask ar galloudoù ekonomikel ha politikel. E brezhoneg hag e galleg e vez embannet ar pennadoù.

Gant *Disclose* eo bet skoazellet *Splann !* ha diwar ar skouer-se ez a en-dro. Da lâret eo : **goulenn digant an dud arc'hantaouiñ an enklaskoù** ha goprañ mat ar gazetennerien, dezho da gaout peadra da vont betek penn o enklaskoù. Roet 'vez an enklaskoù-se d'ar mediaoù a genlabour ganeomp, evit tizhout ar muiañ a lennerien posupl.

Krouet eo bet *Splann !* abalamour m'eo **diaesoc'h-diaesañ kas da benn ul labour kazetenniñ don e Breizh**. E 2020 ez eus bet kaset ul lizher d'ar rannvro evit ma vefe doujet ouzh frankiz ar c'helaouiñ pa reer enklaskoù war sujedoù a denn eus an agroboved. Sinet eo bet al lizher gant 500 kazetenner, harpet gant 50.000 keodedour.

Un tregont ezel bennak a zo er gevredigezh, kazetennerien a vicher an darn vrasañ anezho. Ul labour kenurzhiañ a-youl vat a vez kaset da benn ganto. Kazetennerien all a vez gopret evit kas da benn an enklaskoù. Nevez zo ez eus bet krouet daou bost-labour, ha titlet div gazetennerez gopret war an hirdermen.

Adalek devezh e grouidigezh, **Splann ! en deus dastumet 210.000 €** bet roet gant keodedourien evit arc'hantaouiñ enklaskoù (sammad tizhet e miz Here 2023). Gant *Splann !* ne vez degemeret arc'hant na digant embregerezhioù, na digant strollegezhioù lec'hel. N'eo ket dav koumanantiñ, ha n'eus ket a vruderezh.

Enklaskoù *Splann !* a vez embannet war lec'hienn internet splann.org, ha dre ul lizher-kelaouiñ kaset bep miz en div yezh. Met a-drugarez d'ar mediaoù a genlabour ganeomp e c'heller tizhout lennerien a bep seurt.



HOR SIFROÙ

7

enklask
embannet

29

ezel
bet dibabet

700

den o deus roet
arc'hant

3

bloaz

adalek he c'hrouidigezh

100%
digoust da lenn

+ 7000

den a zegemer
al lizher-kelaouiñ

2

yezh

brezhoneg ha galleg

210 000 €

ROET

gant al lennerien

100%
dizalc'h

1,2 milion

a lennerien

war hol lec'hienn internet
adalek e grouidigezh e miz
Eost 2023 / OVH

1

pajenn wikipedia

20 000

den

oc'h heuliañ hor rouedadoù
sokial (Facebook, Twitter,
Instagram et LinkedIn)

25

lizher-kelaouiñ
bet kaset

77


darvoud

e lec'h ma 'z eus bet tud a-
youl vat ha/pe
kazetennerien *Splann!* evit
kinnig an enklaskoù

15

kazetenner gopret

HON ENKLASKOÙ



Gant Splann ! e klaskomp kaout efedoù mat war ar gevredigezh a-drugarez d'hon enklaskoù. Hon fal a zo lakaat an traoù da cheñch. Diaes eo gouzout pet den resis o deus lennet un enklask bennak dre ma vezont embannet war veur a vedia disheñvel. Padal e ouezomp dre hol lec'hienn internet hag hini ar mediaoù a genlabour ganeomp e vez d'an nebeutañ 250.000 den o lenn ar pennadoù e-kerzh ar sizhunvezh kentañ ma vezont embannet.

Ar pennadoù skrivet ganeomp a lak war-wel sujedoù pouezus war an hir dermen. Gellet a reont bezañ lennet pell goude bezañ bet embannet.

Breizh : c'hwezh an amoniak war ar maez

Gwisket e ruz eo Breizh. Kement a atantoù desevel loened 'zo ma 'z eo Breizh ar vro an hini pennañ o tilaoskeul amoniak er Frañs. Ha gant ar gaz-se, krouet rannoùigoù munud en aer... hag a laz degadoù a viliadoù a dud bep bloaz. Ankenius eo evit yec'hed an dud, hag ouzhpenn-se e weler sklaer dija pegen mantrus e c'hell bezañ evit an endro.

- *Implijet eo bet an enklask-mañ e lezioù-barn gant stourmerien a zifenn an endro, da skouer e afer klud yer bras abominapl e Laoulan (56). Nullet eo bet ar raktres bloaz zo.*

Iberdrola. Pa vez lous ar jeu gant an energiezh « naet »

62 rod-avel zo o vezañ plantet e foñs mor Bae Sant-Brieg, e Breizh, war un takad bras a 75km². Embregerezh spagnol Iberdrola an hini eo a zo e penn ar chanter-se, dre e is-embregerezh breizhat Ailes Marines. An embregerezh spagnol eo an hini pouezusañ er bed da geñver energiezh an avel, hag e embann splann eo « kizidik ouzh gwarez an endro ».

- *Ne oa ket aes an enklask-mañ a-fet stumm. Lennet eo bet gant an dud memestra war hol lec'hienn internet hag hini ar mediaoù a genlabour ganeomp. Desket hon eus eo gwelloc'h ober traoù simpl ha n'eus ket keuz ebet ganeomp !*

Skouerioù

Hon enklask war ar metanaat a zo bet lennet gant 165.534 den ha digoret eo bet hol lec'hienn 218.058 gwech e-kerzh ar sizhun kentañ.

War France 3 Breizh : 170.000 gwel.

War Mediapart : 50.000 gwel.

Ha ret e vefe ouzhpennañ ar re o deus lennet an enklask war Reporterre, Basta!, Dispak, Pobl Vreizh, Radio Breizh, ha kement zo.

Moulet ez eus bet 400 levrig enklask war baper, gwerzhet e-doug darvoudoù publik. Ar gazetennerien o deus skrivet ar pennadoù o deus kemeret perzh e ouzhpenn 10 taol-grenn pe brezegenn evit kaozeal diwar o fenn.

HON ENKLASKOÙ

Moc'h fall

Tost an hanter eus ar moc'h desavet maez douar e Bro-Frañs a zo e Penn-ar-Bed. Bet eo « Splann ! » d'ober e enklask diwar-benn rouaned an industriezh-se ha war harzoù demokratelezh an endro.

- *Diskoachet eo bet gant Inès Léraud ha Kristen Falc'hon ne oa ket bet graet mat an enklask foran bet kaset da benn evit reiñ an aotre d'an atant desevel moc'h Avel Vor e Landunvez (29) da vont war vrasaat. Moullet eo bet an enklask 2.500 gwech gant un den o chom e-kichen an atant. Gantañ eo bet lakaet an enklask e boest lizhiri un toullad eus e amezeien. Goude bezañ bet embannet an enklask ez eus bet ur vanifestadeg enni 500 den a-enep d'ar raktres. Padal eo bet sinet an aotre gant ar prefed e miz Du 2022. Met brudet eo bet an afer e Bro Frañs a-bezh, a-drugarez d'ar reportajoù bet graet gant LCP, BFM pe TF1.*
- *E miz Genver 2023 ez eus bet digoret un enklask justis nevez dre m'eo bet douget klemm gant ar strollad « Stoppons l'extension d'Avel-Vor », war ar fed m'eo bet lakaet en arvar buhez an dud. Gant Antoine Chao ez eus bet graet ur reportaj war an afer evit France Inter. War roudoù kazetennerien Splann ! eo aet evit sevel un abadenn e miz Kerzu.*

Metan : bec'h d'an atant

Breizh eo al lec'h er Frañs ma vez produet ar muiañ a loened. Setu perak eo beuzet ar vro gant distaoladoù loened a fell da labourerien-douar ha da embregerezhioù bras an energiezh treuzfurmiñ en gaz ha goproù. Muioc'h-muiañ a vetanaerezhioù 'zo e Breizh. Tizhet 186 outo e maezioù ar vro e 2022, ha kant ouzhpenn a-benn fin 2023.

- *Embannet eo bet an enklask e brezhoneg war Dispak, Pobl Vreizh ha Radio Breizh, hag e galleg war Reporterre, Basta!, Mediapart, France 3. Kazetennerien Splann ! a zo bet o kinnig an enklask e meur a daol-grenn. Ouzhpenn 10 prezegenn a zo bet graet ganto. Keodedourien, peizanted ha dilennidi a zo deuet da gaozeal ha da dabutal ganto.*



HON ENKLASKOÙ


Essure : drouk mouget e korf ar merc'hed

Abaoe bloavezhioù e c'haller lenn testenioù merc'hed tapet fall o yec'hed goude bout bet lakaet an ensteudoù (*implants*) Essure. Hiziv an deiz e kendalc'h an embregerezh da lâret neus gwerzhet anezho n' eus kudenn ebet gant an ensteudoù. Un diell eus Ajañs ar Yec'hed a lâr ar c'hontrol e 2017. Adkavet eo bet an diell-se gant Splann ! .


- *Embannet eo bet e meur a vedia e oa bet diskoachet ganeomp un danevell eus Ajañs ar Yec'hed (ANSM) a ziskouez eo dañjerus an ensteudoù Essure. Deuet eo da vezañ an enklask en deus graet muioc'h a drouz er-maez eus Breizh. Aet eo war-raok an afer evit lod eus ar merc'hed o deus bet eil efedoù a-drugarez d'ar pennadoù. Implijet e vo ganto an danevell er justis.*
- *Skouerioù eus mediaoù o deus komzet eus an enklask (estreget a re a genlabour ganeomp : France 3, Mediapart, Elle, Basta!, Ya !, Dispak) : Le Monde, France Bleu, Ouest-France, Femme Actuelle, Révolution permanente, Neon mag, Génétique, Causette, Marie-Claire, Le Progrès, France 3 Auvergne Rhône Alpes.*

Brezel er parkeier

C'hoant zo staliañ mil labourer-douar ar bloaz bep bloaz a-benn 2028 e Breizh. Hiziv n'eus nemet 500 a-boan a zeu a-benn d'en em staliañ, e-keit ma weler atantoù divent o tont war-wel savet a-drugarez da zoareoù arc'hantaouiñ gwall luziet . Tiez-feurm 1.000 hektar, 1400 a-wechoù zoken. Boas eo deuet gwelet atantoù ouzhpenn 200 hektar tachenn outo. En ur ober dek vloaz e oa deuet an hanter muioc'h diouto... Boas eo deuet gwelet atantoù gant ouzhpenn 200 hektar tachenn. En ur ober dek vloaz e oa deuet an hanter muioc'h diouto.



HON ENKLASKOÙ



HOR C'HEVELERIE

Enklaskoù *Splann !* a vez embannet war hol lec'hienn internet ha dre ul lizher-kelaouiñ. Embannet e vez ivez war meur a vedia disheñvel evito da dizhout muioc'h a dud.

Dre ma vez embannet ar memes enklask war vediaoù lec'hel, rannvroel, broadel hag etrevroadel emamp sur e vez titouret kalz a dud. **Kenlabourat gant mediaoù all a zo un doare da lakaat an titouroù da vezañ dasparzhet digoust en un doare ledanoc'h : an holl a c'hell lenn anezhe.**

Ne vez ket kenlabouret gant ar memes mediaoù hervez sujedoù an enklask. Da skouer, dre France 3 Breizh e c'hellomp tizhout lennerien lec'hel. Dre Reporterre e tizhomp lennerien kizidik ouzh an endro. Sujedoù a-denn eus yec'hed ar merc'hed a vez embannet war gelaouennoù evel *Elle*.

2022 zo bet ur bloavezh mat evit ***Splann !*** abalamaour m' eo bet embannet titouroù an enklaskoù war mediaoù bras evel ***Le Monde, l'AFP, RFI, France Bleu***. Aterset eo bet kazetennerien *Splann !* gant meur a chadenn tele ha radioioù.

A-drugarez d'hon c'hevelerien ha d'ar mediaoù a lak war-wel ar pezh a vez graet ganeomp eo efedusoc'h skog hon enklaskoù.

An holl vediaoù a genlabour ganeomp a embann an enklask e memes koulz. Un doare da grouiñ un «darvoud ». Setu perak e klaskomp choaz ar mare gwellañ evit embann anezho. Da skouer, hon enklask diwezhañ diwar-benn brezel ar parkeier a zo bet embannet e penn-kentañ saloñs an desaverezh loened. Setu penaos e klaskomp lakaat an dud da dabatal **war sujedoù pouezus evit ar gevredigezh.**

E-touez ar mediaoù a genlabour ganeomp alies



HON EMGAVIOÙ WAR AN DACHENN

N'eo ket echu hol labour pa vez embannet hon enklask. **Alies mat ez eomp da heuliañ darvoudoù, prezegenoù ha festivalioù evit lakaat an titouroù da vont pelloc'h ha da eskemm gant an dud.** Un doare da grouiñ liammoù gant ar Vretoned ha **da zastum titouroù hag arc'hant**, met ivez da gelaouiñ an dud diwar-benn frankiz ar mediaoù.

Mont a reomp ivez da zarvoudoù micherel evel Festival ar c'helaouiñ lec'hel e Naoned, Médias en Seine e Pariz, darvoud-meur ar c'hazetenniñ e Teurgn, festival kazetenniñ eus Couthures-sur-Garonne, festival sinema Douarnenez pe Festival Intergalactik e Brest, Longueur d'ondes e Brest...

Skouerioù e 2023 - n'eo ket an holl !

18 a viz Genver : Taol-grenn gant Kristen Falc'hon e festival Pluie d'images e Brest ;
4 a viz C'hwevrer : Taol-grenn diwar-benn ar produiñ tredan e bed al labour-douar gant Raphaël Baldos e-pad Forom sokial lec'hel Mor-Bihan e Sine ;
23-24 a viz C'hwevrer : Grand Reporterre #6 e sal c'hoariva Point du jour, e Lyon, gant Morgan Large ;
25 a viz C'hwevrer : Prezegenoù war an ensteudoù Essure hag ar metanaat gant Juliette Cabaço Roger ha Raphaël Baldos, eus 5eur da 9eur, e lokal eus Douarnenez ;
3 a viz Meurzh : Eskemm tro-dro d'an abadenn Bezhin glas e Stéréolux, e Naoned ;
18-19 a viz Meurzh : kendiviz e-pad Foar Bio Landerne gant Juliette Cabaço Roger ;
24 a viz Meurzh : Festival Nos Futurs, e Roazhon, gant Sylvain Ernault ha Faustine Sternberg ;
30 a viz Meurzh : Darvoud-meur ar c'hazetenniñ e Teurgn gant Juliette Cabaço Roger ;
10 a viz Ebrel : marc'had Sizun, gant Julie Lallouët-Geffroy evit ur brezegenn diwar-benn ar metanaat ;
10 a viz Ebrel : Nozvezh tro-dro da Emzalc'hoù an douar e Pariz gant Inès Léraud ;

21 a viz Ebrel : Grand Reporterre #6 e sal c'hoariva Point du jour, e Lyon, gant Morgan Large ;
27 viz Ebrel : Digor kalon skiantel gant an AJSPI (association des journalistes scientifiques), gant Sylvain Ernault ;
13 a viz Mae : Abadenn-BD war enez Vaz ha kinnig Splann ! gant Kristen Falc'hon ;
24 a viz Mae : Devezh skiantoù ha mediaoù ;
30 a viz Mae : Prezegenn diwar-benn ar frankiz da gelaouiñ e Science Po Roazhon gant Julie Lallouët-Geffroy ;
14 a viz Even : Rak-skignadenn ar film Bezhin glas e Gwengamp gant Juliette Cabaço Roger hag Alain Miossec ;
22 a viz Even : Ines Léraud ha Nicolas Legendre war-eeun e 52 sal sinema ;
3 ha 4 a viz Even : Dibenn Sizun an traoù a cheñch, e Binig, gant Sylvain Ernault ;
9 a viz Gwengolo : deiz-ha-bloaz 15 vloaz Médiapart, Roazhon ;
27 a viz Gwengolo : kendiviz goude bezañ sellet ouzh ar film Bezhin Glaz, Plelan ;
14 a viz Here : Kêriadenn an traoù posupl e Roazhon, Julie Lallouët-Geffroy, Raphaël Gitton.
Ha kement zo...



Pedet e oa bet Splann ! da vont da Vro-Gembre e-touez kazetennerien all evit kaozeal diwar-benn penaos krouiñ e yezhoù minorelaet. Ar brezegenn a zo bet graet e brezhoneg hag e kembraeg gant tud o treiñ war-eeun. Amañ Tudi Crequer (France Bleu), Enora Molac (Radio Bro Gwened), Nik Yeo (kembre), Juliette Cabaço Roger (Splann !) ha Mari Elen (kembre).

PA VEZ DIFENNET FRANKIZ AR MEDIAOÙ GANEOMP

Splann ! a zo ezel eus :

- Kevredigezh « Informer n'est pas un délit »
- CDJM, le Conseil de déontologie journalistique et de médiation
- Spiil - Syndicat de la presse indépendante d'information en ligne
- Strollad Stop Bolloré
- Les États généraux de la presse indépendante
- Observatoire de la liberté de la presse

SOUTEN

« Digorit ho prenestroù, lennit ar mediaoù dizalc'h »
« Stop Bolloré »: ur strollad a ziskoach perak emañ an holl mediaoù etre daouarn un den pinvidik-mor.

https://www.liberation.fr/economie/medias/stop-bolloré-un-collectif-denonce-lempire-médiatique-reactionnaire-du-milliardaire-20220216_4UXXYBB6EZBNJBKHPNKMI135I/

100 media dizalc'h hag ur strollad kazetennerien a zo bamet gant dibab ar justis da reiñ gwirioù d'an den pinvidik-mor Serge Drahi hag e strollad Altice a-enep d'hor c'henlabouerien Reflets.info. War abegoù sekredoù an embregerezhioù eo bet dibabet gant lez-varn kenwerzh Nanterre n'eus ket tu ken embann titouroù diwar-benn Altice.

<https://fondspreselibre.org/appele-drahi-ne-nous-fera-pas-taire>

« Splann ! » a sin un destenn evit souten Mediapart a-enep d'an disfiz goulennet gant aotrou maer St Étienne.

<https://www.latribune.fr/opinions/tribunes/une-attaque-sans-precedent-contre-la-liberte-de-la-presse-941730.html>

« Splann ! » a sin an destenn bet skrivet gant Klub kazetennerien Breizh evit souten kazetennerien Ar Poc'hêr ha France 3 Breizh a zo taget gant an tu-dehoù pellañ.

<https://splann.org/solidaire-poher-extreme-droite/>

An SNJ-CGT, an SNJ, ar CFDT-Journalistes ha « Informer n'est pas un délit » a c'houlenn e vefe gwarezet ar sacherien-evezh. Soutenet int gant 50 strollad, kevredigezhioù hag aozadur kazetennerien.

<https://www.lavie.fr/idees/debats/protection-des-lanceurs-dalerte-et-liberte-de-la-presse-un-couple-indissociable-80475.php>

« Splann ! » a harp « Le Poulpe » evit ma ne vefe ket diskoachet e vammennoù


<https://splann.org/splann-soutient-le-poulpe-contre-la-violation-du-secret-des-sources/>

« Splann ! » a souten kazetenner Grégoire Souchay hag a zo kaset dirak al lez-varn evit bezañ skrivet ur pennad diwar-benn ar « Falc'herien »

<https://splann.org/soutien-journaliste-gregoire-souchay/>

« Splann ! » a souten Morgan Large. Divontet ez eus bet un eil gwech rod he c'harr-tan evit bezañ bet labouret war an agro-boued e Breizh.


<https://www.mediacites.fr/breve/nantes/2023/03/30/la-journaliste-bretonne-morgan-large-victime-dun-second-sabotage-de-sa-voiture/>



HON SAVADOÙ

Muioc'h-mui a arc'hant roet gant an dud e 2023

Eus pelec'h e teu an arc'hant 2021, 2022, 2023 et 2024



Arc'hant all hon eus degemeret evit mont pelloc'h gant hon raktres ha tizhout muioc'h a dud gant hon enklaskoù

15.000 €
Font evit ur c'hazetenniñ dizalc'h (sikour evit goprañ kazetennerien war an hir-dermen ha kehentiñ gwelloc'h).

30.000 €
Sikour d'ar mediaoù Yalc'h evit diorren ar mediaoù nevez (sikour evit mont war-raok gant an arc'hantaouiñ, al lizher-kelaouiñ hag ar gevelerien)

- 15.000€ eus ar Redadeg evit arc'hantaouiñ podkastoù e brezhoneg
- 20.000 € Sikour d'ar mediaoù Yalc'h evit diorren ar mediaoù nevez (sikour evit al lec'hienn internet, ar marketing hag all)
- 10.000 € *War c'hed* evit reseviñ font kevredigezhel Télénantes
- 20.000 € *War c'hed* Sikour d'ar mediaoù Font evit ar mediaoù lec'hel (mont muioc'h war an dachenn, levriegoù enklask)
- 22.350 € bet roet gant an Journalism fund Europa evit sevel ur raktres video a-benn lakaat tud disheñvel da vezañ titouret.

HON DISPIGNOÙ

Bilañs ha raktresoù da zont


An holl arc'hant a zo bet roet gant an dud e 2021, 2022 ha 2023 a zo bet implijet evit arc'hantaouiñ hon enklaskoù-kazetenniñ. Un nebeud zo bet lakaet a-gostez kenkaz e vefe fredoù justis.

Tout ar pezh a denn eus mont en-dro ar gevredigezh (burev, kontoù...) hag eus an diorren (sikour da broduiñ levrigoù paper ha videoioù, d'an embann...) a zo bet arc'hantaouet gant fontoù sikour d'ar mediaoù dizalc'h.

	2021	2022	2023	2024
arc'hant roet	90911	49940	99000	110000
pennadoù gwerzhet	0	435	1500	1500
levrigoù gwerzhet	0	2423	4600	7200
yalc'hadoù	0	15000	30000	97350
savadoù	90911	67798	135100	216050
mont en dro	456	3849	16967	16460
levrigoù gwerzhet / podkast	0	1442	6373	42350
enklask	19721	53313	91680	157229
fredoù justis	20000	20000	20000	
dispignoù	40177	78604	135020	216039
a chom	50734	-10806	80	11

Da zont

Muioc'h-mui a enklaskoù



Da zont

PETRA A VEZ GRAET GANEOMP WAR AN DACHENN

C'hoant o deus izili *Splann* ! trugarekaat an holl o deus arc'hantaouet hon enklaskoù adalek ar penn kentañ.
A-drugarez d'ho harp hon eus gellet :

- Kas da benn enklaskoù en ur c'hoprañ kazetennerien a-vicher a labour war an dachenn, heuliet gant kazetennered gouestlet da genurzhañ. Embannet ez eus bet seizh enklask doun, tri all a zo war ar stern, war sujedoù a-bouez evit ar Vretoned. Ur plas en deus *Splann* ! bremañ e-touez ar mediaoù all.
- Kas bep miz ul lizher-kelaouiñ gant pennadoù liammet gant an enklaskoù, met ivez titouroù dedennus evit hol lennerien, dezho da heuliañ keleier ar vro.
- Treiñ hon enklaskoù evit ma vefe embannet hon enklaskoù e brezhoneg hag e galleg.
- Goprañ alvokaded, deomp da c'houzout ar riskloù a vez kemeret ganeomp war sujedoù kizidik.
- Mont war-raok gant ar mediaoù a genlabour ganeomp evit ma vefe embannet hon enklaskoù.
- Gwellaat hon c'hehentiñ ha kaout ul liamm kreñvoc'h gant al lennerien.
- Gwellaat surentez hon benvegoù urzhiataerezh hag ober ul lec'hienn internet nevez.
- Embann muioc'h a draoù war ar rouedadoù sokial.
- Mont war an dachenn pa vez darvoudoù publik.
- Moullañ levriegoù paper evit ma vefe lennet an enklaskoù gant tud disheñvel. Un doare ivez da vezañ muioc'h anavezet, ha kaout muioc'h a dud oc'h arc'hantaouiñ ar media.
- Ijinañ raktresoù videoioù ha podkastoù e brezhoneg evit 2024.
- Dont da vezañ michereloc'h en ur aozañ gwelloc'h hon c'hevredigezh gant sikour tud a vicher. Div gazetennered a zo bremañ gopret war an hir-dermen evit kenurzhañ buhez *Splann* !. Labourat a reont start gant ar c'huzul merañ bet dilennet gant an 29 ezel evit ma vefe padus ar media.



HON IZILI

KAZETENNERIEN

BALDOS Raphaël
CABACO-ROGER Juliette
ERNAULT Sylvain
FALC'HON Kristen
KERBRAT Yann-Malo
LALLOUET-GEFFROY Julie
LERAUD Inès
LOGVENOFF Ivan
MARIE DIAZ Itzel
STERNBERG Faustine
TROUILLET Caroline

KUZUL MERAÑ

E karg eus mont en-dro en diabarzh *Splann !* eo ar c'huzul merañ. Dilennet e vez gant bodadeg-meur ar gevredigezh. N'eus na prezidant na bez-prezidant : an hevelep galloud zo gant an holl.

Setu roll perzhidi ar c'huzul merañ adalek d'ar 4 a viz Eost 2022 :


Morgan Large, kazetenner
Raphaël Gitton, kelenner war an istor
Alain Goutal, kazetenner-tresour
Alain Miossec, kelenner war e leve
Sylvain Ernauld, kazetenner
Anne Kiesel, kazetenner

SKIPAILH WAR AR BEMDEZ

BRUNEL Vivien - melestradur
CABACO-ROGER Juliette - penn-gazetenner
ERNAULT Sylvain - kehentiñ
LA PRAIRIE Jeanne - diorren
STERNBERG Faustine - penn-gazetenner

Splann ! a zo disoc'h labour a-stroll meur a zen a-youl vat, kazetennerien, troerien, tud barrek war ar velestradurezh, tresourien, diorroerien web hag all !





AR PEZH A VEZ LAVARET GANT
HON LENNERIEN



Trugarez vras evit ho labour dizehan war dachenn ar wirionez! Ma c'hellfen reiñ muioc'h e rafen. Evit poent ez on laouen d'hen ober gant an nebeudig a c'hellan ! Bec'h de'i! Ezhomm hon eus deus oudoc'h !!!

Ul labour a-feson a vez graet geneoc'h. Tennit stert !

Ret eo tennañ pell hag uhel mouezh Breizh evit an holl !

Mersi bras deoc'h ! <3

Kalon vat ha Bloavezh Mat!

Trugarez evit ho labour. Poent e oa kaout keleier gwir ha splann....

Trugarez vras evit ho labour dizehan war dachenn ar wirionez. Ma c'hallfen reiñ muioc'h e rafen. Evit poent ez on laouen d'en ober gant an nebeudig a c'hellan ! Bec'h dei ! Ezhomm hon eus eus outoc'h !

Salud deoc'h kamaraded, ur raktres vac'h ha brav eh oc'h é kas. Saludoù a Bleuwigner!. Ma peus afer sekour, monet e darempred get rud e bro An Alre, Gwened ha rac'h, kasit din ur mail. Me oa kazetennour gwezh arall ha ne 'm eus ket kollet ar youl da dreuskas ar wirionez

Kendalc'hit 'vel-se !

A galon ganeoc'h!

